

# ROUE AR FRANS

394

Er bloaz tremen, eo bet lidet, e Cleder, d'an 18 a viz Gwengolo hag e Penmarc'h, d'an 30 a viz Du, Gouel kantvet bloaz an A. Gwilhou, brasa barz a zo bet ganet e Breiz, en XIX<sup>vet</sup> kantved.

Setu aman unan eus e werziou kaera ; savet eo bet gantan er bloaz 1871 ; kenteliou fur a zo enni ha ma vijent bet laket da dalvezout, e koulz, n'eo ket da lavaret e vije bet Feiz ar Frans ken izel nag he yalc'h ker goulllo ha ma z'int breman.

En hon amzer, na petra 'ta, ne jom netra ken gant ar gristenien da ober nemet degas gwellaenn en trede Republik muia ma c'hellint.

Betek peur, o va Doue, e vo gwelet Bro-C'hall,  
Breset gand enebourien, pistiget gant tud fall,

Pelec'h ema ar sturier 'c'hellfe dre e furnez *(alvezquez c'c'vez)*  
Miret outi da skei ouz kerreg didruez ?

Eun den, eun den a glaskomp ha ne gavomp netra  
Nemet bugale dister, war o zreid o krena.

En o dourn eur storloker pa ve red eur c'hleze  
Graet gant dir, graet gant houarn ha dremmet a-zoare.

Penaos eta e stourmimp ouz ar ganfarted rus

A zo e kêr, er maeziou, o labourat founnus,  
O teurel branch ha bilim ouz kement a zo mat  
Hag o vernia ar c'heuneud 'vid ober eun tantad.

An tantad-ze mar gellont, hepdale a zevo

Hon enor hag hon danvez, hor feiz koz hag hor bro,  
Ne chomo war an douar, nag iliz, nag aoter...  
War ho tilhad e nijo ludu kroaz Hor Zalver.

1#

Ra zeu| va zeod dirazoc'h da skourni em genou,  
Ha va brec'h dehou da zounna, ma prezegan ar gaou,  
Paris o tivogedi, eun arc'heskob lazet,  
Re sklaer, siouaz, a ziskouez ne laran gaou ebet !

1y

Ar Republik a lavar e c'hello dont a-benn  
Da zerc'hel bleizi, denved, e peoc'h war e barlenn,  
D'ober breudeur anezo, d'o c'has war al leton,  
Evid eno, fri-ha-fri, glazeri o c'halon.

An denved a zo denved, kigerien ar bleizi,  
N'eo ket furnez o lakat, mesk ha mesk da beuri ;  
Pa vo stag gand ar geot ar paour kaez penn-danvad  
Ar bleiz a zailho warnan hag a evo e wad.

Deuet eo bet ar Republik diou wech en hon touez  
Atao, diwar ar gounnar, fall du ha divadez,  
Laerez, blasphemi Doue, laza ha c'hoaz laza,  
Setu e tri c'her, istor ar Republik kosa.

Hag em be kant teod maouez, birvidik em genou,  
Biken n'hellfen disklaeria pegement a grimou  
Zo bet graet gand ar wrac'h-se a vuntras roue 'r Frans  
Hag a gasas d'ar chafod beleien ha foblans.

An eil Republik ive, henvel ouz he mamm gris  
Lipous a zunas ar gwad war mein ruiou Paris,  
Kement a fank a vresas ma chomas 'barz ar pri ;  
Ne dano ket va lagad oc'h ober kaon d'ezi.

Ar Republik 'zo hizio a zo mez he gwelet ;  
Eur barr tousegi arnev war hor bro 'zo skoet ;  
C'houezet, war o c'hrabanou, war gorre an dosenn,  
E kav d'ezo int gwazed... amprevaned n'int ken.

N'eo ket gant pri ar poullou eo e vev ar re-ma,  
Na gant nebeud gwenneien, tra,tra,tra,tra,tra,tra,  
Pa vezo bet eur rummad e teuy eur rummad all  
Ha gwaderezed nevez evit suna Bro-C'hall.

Atao e vimp ruilh, diruilh er revolution,  
Rak hor Republikaned 'zo hep relijion,  
Chenthet hon eus daouzek gwech e pevar ugent vloaz,  
Hag a fors da ziloja emamp hirio en noaz !

12

1e

Ne deus nemed eur remed da drouc'ha hon terzienn,  
 Doue, en hor c'halonou, hag eun den en hor penn.  
 Eun den, ve ar gwir gantan 'vit miret da laret :  
 — Perak hennez en uhel ha me ne vefen ket ?

Epad pevarzek kant vloaz ar Frans 'zo bet eurus,  
 Dreist pep bro anavezet hounnez a oa nerzus ;  
 Pa lavare eur gerig, an douar a dave  
 Ha pa zave he banniel, ar' bobl holl a stoue.

Rak neuze ar Fransizien a oa gwir zoudarded  
 A zifenne an Iliz hag ar gwir, dre ar bed,  
 Neuze hor boa rouanez lejitim ha kristen  
 Hag a oa gloar hag enor stag ouz o drapo gwenn.

Eus a wad Herri pevar e chom eur beradig  
 Eus ar gwad-ze ken nerzus, ken dous, ker pinvidik,  
 Miret gand ar Brovidans, ma vi, Frans, adarre,  
 Ar c'haera rouantelez, goude hini Doue.

Arabad eo argila, dre ma klevimp *krial*,  
 Bezomp eur wech kalonek, harpomp ouz an dud fall ;  
 Herri pemp 'zo dirazoc'h, gantan e vanniel gwenn,  
 Hennez eo hor gwir roue... Plas d'ezan, Fransizien.

*1 krial*

Yann WILHOU.

# uniou war Vleuniou

Da zoudarded ar brezel bras  
a zo chomet o relegou ~~et~~  
~~lec'h~~ m'o deus stourmet

19  
/el lec'h

## I

Bleuniou melen menezioù Breiz  
Skuilhit daelou war zouar hor Bro :  
E zud yaouank kaer 'vel an deiz  
ell deus outi a zo maro.

## II

ijit buan dre an avel  
'ar o beziou noaz ha distro  
r c'houez dudius 'roec'h d'o c'havell  
gavint c'hoaz dousoc'h eno.

## III

O galvit holl dre o ano  
Da lavaret da bep hini :  
— Da vro biken na zizonjo  
He mab karet maro 'viti.

## VI

— Pa vez kuzet d'an daoulagad  
N'eus fors pe lec'h ha pegen doun,  
Ebarz da vez, dre hor c'houez vat  
Atao 'klevi mouez he c'haloun.

/u  
/oun

## V

- Mouez he c'haloun ouz da c'hervel  
a laret d'it 'z out er maro  
en beo ha pa oas 'n da gavell  
a muoc'h karet eged eno ! »

G. MEVEL.